


correlion vntes



ken vreuriez AR BREZONEG

T A O L E N N an niverenn 30

- I. Suliou an Azvent.....pajenn 2-8
- II. Ar Briedelez (eil lodenn).....pajenn 17
- 1/ Al lennadennou.....pajenn 17
- 2/ Ar salmou.....pajenn 30
- 3/ An aviel.....pajenn 34

Troidigeziou aotreet da arnod evid an
Eskopti a-berz an Aotrou F.Barbu,eskob
Kemper ha Leon.

Kemper d'an 3/12/1973

Visant Fave
eskob-skoazeller

oooooooooooooooooooo


Taolit evez !

Al Levr C a dlie dond er mêz eus a zindan ar wask evid an Azvent.
Gant or gwella bolontez n'om ket deuet abenn d'e gaoud e poent hag
en amzer.Rezit ar vadelez d'on digarezi ha da gemered aun tammig pa-
sianted.Pa vo prest,e vo kaset d'ar re her goulennno diganeom.

Da hedall on-eus lakeet lennadennou suliou an Azvent er haier-mañ(30).
Ar pedennou evid an oll suliou ar bloaz a gaver war ar haierou azaleg
an niverenn 17 beteg an 29.

Tiouallit !

Gand an niverenn-mañ,e krog ho kourmant nevez.Digas a ran eta da
soñj d'ar re n'o-deus ket c'hoaz renevezet o hini,ema ar mare d'hen
ober,ar henta 'ar gwella.Trugarez dezo en araog ha bennoz Doue d'ar
re o-deus dija paeet o dle.



ANZER AN AZVENT

SUL 1^a AN AZVENT



Lennadenn 1^a. - Klevom ar bromesa grêt gand Doue da zigas
eur Zalver hag a vo euz lignez David.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED JEREMIAZ (33/14-16)

14. Lavar an Aotrou Doue eo : Setu deizioù o tond, ma tigas da wir
ar gomz vad am-eus bet lavaret da diegez Israel ha da diegez Juda.
15. En deizioù-se ha d'ar mare-se, e lakin da ziwan da Zavid
eun hadenn euz e wad : leun a justis e vo,
ha lakaad a ray da rén ar gwir hag ar justis dre ar vro.
16. En deizioù-se, e vo salvet Juda, ha Jeruzalem a vevo dienkreiz,
hag evelhénn e vo anvet kêr : "An Aotrou just ha mad evidom".



SALM 24 / 4bc-5ab, 8-9, 10 & 14 - Diskan : Warzu ennoh e savan va ene
va oll fiziañs 'zo ennoh va Doue.

4. Grit din anaoud hoh heñchou, Aotrou Doue; deskit din ho kwenojennou.
5. Grit din kerzed ouz sklerijenn ho kwirionez, ha kelennit ahanon,
rag c'hwil eo va Doue salver.
8. Mad ha reiz eo an Aotrou; rag-se d'ar beherien e tiskouez an hent eeun.
9. Rén a ra an dud izel da heulia bolontez Doue,
deski 'ra d'ar re izel e heñchou dezañ e-unan.
10. Heñchou an Aotrou n'int nemed madelezh ha fealded,
evid an dud a zall d'an emgleo gantañ ha d'e lezenn.
14. Eur mignon eo an Aotrou evid ar re a zouj anezañ;
hag e lezenn a ro dezo d'o sklerijenna.

Eil Lennadenn . - An Abostol a ro ali d'ar gristenien
da vond atao war wellaad, evid beza prest
a-benn donedigez Or Zalver.

PENNAD EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN TESSALONIK (3/12 - 4/2)

12. Va breudeur, plijet gand an Aotrou Doue ho karga heb muzul
a garantez kenetrezh hag e keñver an oll,
koulz ha ni en ho keñver.
13. Plijet gantañ delher stard ho kalonou,
deoh da veza direbech, er zantelez, dirag Doue, on Tad,
a-benn donedigez Jezuz, on Aotrou, gand e oll zent.
- 4/1. Setu eta, va breudeur, e reom ouzoh
ar goulenn hag ar bedenn-mañ en Aotrou Krist :
evel m'ho-peus desket ganeom penaoz rén ho puez
evid plijoud da Zoue, - hag hen ober a rit dija -
grit c'hoaz, hag atao gwelloh.
2. Rag gouzoud a rit mad peseurd gourhemennou on-eus roet deoh
a-berz an Aotrou, Jezuz Krist.



ALLELUIA! Diskouezit deom, Aotrou, ho madelez,
ha digasit deom ho silvidigez. ALLELUIA!

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (21/25-28, 34-36)

En amzer-se, e lavare Jezuz d'e ziskibien :

25. "Bez' e vo sinou burzuduz en heol, el loar hag er stered;
ha war an douar, gwall anken a wasko ar poblou,
nèhet ma vint gand trouz ar mor ha fraill an tarzou,
26. kén na vo an dud trohet o alan gand ar spont,
er gortoz euz ar pez a hoarvezo gand ar bed a-béz,
rag brañsella 'raio astrou an neñv.
27. Neuze e vo gwelet Mab an den o tond er goabrenn
gand eur braz a halloud hag a hloar.
28. Pa vo kement-se krog da hoarvezoud, en em lakit sonn ha savit ho penn,
rag tostaad a ra ho silvidigez.
34. Evidoh hoh-unan, diwallit na ve morzèt ho kalonou
gand an debri hag an eva re, ha gand nehamañchou ar vuez,
ha na zeufe an deiz-se warnoh dre laer, evel eur roued d'ho paka,
35. rag koueza 'raio war an oll dud o veva war an douar a-bez.
36. Chomit eta war zihun, o pedi e peb amzer,
evid beza e stad d'en em denna euz an oll draou-se a zo da zond,
ha d'en em gaoud dirag Mab an den.

EIL SUL AN AZVENT



Lennadenn Ia . - Pa glevom ar profed o rei kelou laouen
da Jeruzalem, sonjom, ni kristenien, emaom
e kêr Jeruzalem an amzeriou nevez: an Iliz eo.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED BARUK (5/1-9)

1. Tennit 'ta, Jeruzalem, ho tillad a gañv hag a zienez,
ha gwiskit warnoh splannder gloar Doue evid atao.

2. Da vantell en-dro deoh, lakit justis Doue ;
da gurunenn war ho penn, gloar an Hini peubadel .
3. Rag ema Doue o vond da ziskouez ho sked-c'hwi
da gement a zo dindan an oabl .
4. An ano-mañ a vo roet deoh gand Doue da viken :
Peoh ar justis, ha splannder doujañs Doue .
5. En ho sav, Jeruzalem! sonn war an uhel, ha sellit ouz ar zav-heol :
gwelit ho pugale, dastumet euz ar zav-heol beteg ar huz-heol ,
diwar gomz an Hini santel ,
laouen oll o veza m'e-neus bet Doue soñj anezo .
6. Ho kuiteet o-doa war droad, stlejet gand an enebourien ;
digaset int en-dro gand an Aotrou ,
douget gand enor evel bugale d'ar roue .
7. Rag grêt e-neus Doue e venoz :
izellaad peb menez uhel ha peb torgenn oll-baduz ,
ha stanka an traoniennou evid kompeza an douar ,
ma hello Israel kerzed dienkreiz dindan gloar Doue .
8. Ar hoajou zokén, hag ar gwéz c'hwéz-vad a beb seurd ,
dre urz Doue, a roio disheol da Israel .
9. Evid gwir, bez' e vo Doue o tigas d'ar gêr Israel leun a levenez ,
o rei dezo e hloar d'o sklerijenna ,
e drugarez hag e justis d'o ambroug



SALM 125 / 1-2ab, 2cd-3, 4-5, 6.

Diskan : Traou kaer 'n-eus grêt Doue 'vidom,
E barr al levenez emaom .

1. P'e-neus an Aotrou digaset d'ar gêr tud divroet Sion,
e oa evidom evel eun huñvre .
- 2ab. C'hoarz laouen ganeom leiz or ginou, ha kan war or muzellou .
- 2cd. Neuze e lavare tud ar broiou payan :
"Ken kaer traou e-neus grêt an Aotrou evito!"
3. Ya, ken kaer traou e-noa grêt an Aotrou evidom,
hag edom e barr al levenez .
4. Digasit d'ar gêr, Aotrou, on tud prizoniet,
evel froudou dour en dezert .
5. Ar re a hade en eur skuill daelou, a ray an eost en eur gana .
6. Mond ha dond a reent en eur ouela, pa daolent had en douar ;
dond a reont en-dro en eur dridal laouen,
pa zougont o drammou-ed a-vriadou .

E il Lennadenn . - Mall e-neus sant Paol da weled e gristenien
divlam ha direbech a-benn donedigez Or Zalver .

PENNAD EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-FILIP (1/4-6, 8-II)

4. Va breudeur, e peb amzer, em oll fedennou,
e ran a galon laouen ar bedenn evidoh ,
5. ablamour d'ar perz ho-peus kemeret ganin en Aviel ,
adaleg an deiz kenta beteg bremañ .
6. Fiziañs am-eus e kement-mañ : an Hini e-neus boulhet ennoh al labour-se
a gazo anezañ da benn beteg devez ar Zalver Jezuz .

8. Doue a zo test evidon penaoz ho karan-c'hwi oll,
e kalon dener ar Zalver Jezuz.
9. Ha setu va fedenn : ra vezoh karget muioh-mui a garantez,
gand anaoudegez euz ho feiz
ha gand peb skiant evid dibaba ar pezh a zo ar gwella;
10. hag evelse, ra vezoh divlam ha direbech a-benn devez Or Zalver,
11. leun ho taouarn euz ar frouez a zoug eur vuez vad dre Jezuz Krist,
evid gloar ha meuleudi Doue.



ALLELUIA! Eeunit an hent d'an Aotrou da zond;
peb dén a welo ar Zalver.- ALLELUIA!

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (3/1-6)

1. D'ar pemzegved bloaz ma oa Tiber Sezar impalaer (e Rom)
p'edo Pons Pilat gouarnour Bro-Judea, Herodez tetrark Bro-Halilea
Filip, e vreur, tetrark brouiou Iturea ha Trakonitiz,
Lysaniaz tetrark Bro-Abilen,
2. ha pa oa beleien vraz Annaz ha Kaifaz,
setu komz Doue roet da glevet da Yann, mab Zakariaz, er goueleh.
3. Dond a ra Yann eta, hag e kerz a-dreuz hag a-hed bro ar stér Jordan;
o prezeg eur vadiziant a binijenn, evid pardon ar pehejou,
4. evel m'eo skrivet e levr ar profed Izaiaz :
"Mouez eun dén o krial er goueleh :
Kempennit an hent d'an Aotrou; eeunit dezañ e wenojennou.
5. Peb traonienn a vo stanket, peb menez ha peb torgenn a vo izelleet;
an heñchou kamm a vo eeunet, hag ar re skoselleg kompezet
6. Ha peb dén a welo ar zilvidigez euz a Zoue."

TREDE SUL AN AZVENT



Lennadenn 1a.- Doue e-unan a vo levenez vraz ennañ,
pa vo salvet e gêr zantel hag e bobl a-bez.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED SOFONIAZ (5/14-18a)

14. Savit kanou joaiuz, merh Sion !
taolit youhadennou a levenez, Israel !
Bezit laouen ha tridit a-greiz ho kalon, merh Jeruzalem !
15. Torret e-neus an Aotrou ar varnedigez a boueze warnoh,
argaset e-neus hoh enebourien;
roue Israel eo an Aotrou en ho kreiz,
n'ho-po ket aon da gaoud mui rag droug ebéd.
16. En deiz-se, e vo lavaret da Jeruzalem :
"Bezit heb aon, kêr Zion! na lezit ket ho taouarn da zinerza.
17. An Aotrou, ho Toue, a zo en ho kreiz, brezelour salver :
levenez vraz a vo ennañ ablamour deoh,
buez nevez a roio deoh en e garantez,
- 18a. tridal a ray laouen evidoh, evel d'an derveziou gouel.

SALM EUZ LEVR IZAIAS 12/2-3, 4bcd, 5-6



Diskan : Kanit laouen ha joaiuz, tud Sion,
en ho touez 'ma ar Zant a Israel.

2. Setu Doue va zilvidigez : fiziañs am-eus, heb aon rag netra;
rag va nerz ha va hanaouenn eo an Aotrou, va zilvidigez eo.
3. C'hwil a denno dour gand levez, euz feunteuniou ar zilvidigez.
4. Meulit an Aotrou ha brudit e ano,
roit da anaoud d'ar poblou e oberou kaer,
embannit pegen uhel eo e ano.
5. Kanit gloar d'an Aotrou evid e oberou kaer,
skignit ar vrud anezo dre an douar a-béz.
6. Tridit gand levez, youhit laouen ha joaiuz, tud Sion,
rag braz eo, hag en ho touez ema ar Zant a Israel.

Eil Lennadenn. - Euz e brizon e klevom sant Paol o lavared
"Bezit laouen". Selaouom ha sonjom ervad.

PENNAD EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-FILIP (4/4-7)

4. Va breudeur, bezit laouen én Aotrou, or Zalver, bepred;
ya, c'hoaz eur wech e lavaran : Bezit laouen !
5. Ho puez vad ra vo sklêr evid an oll dud.
An Aotrou, or Zalver, a zo tost.
6. Arabad beza enkrezet gand seurd ebéd;
med e peb digouez, a-bouez pedi hag aspedi, en eur drugarekaad,
kasit ho koulennou dirag Doue.
7. Ha peoh Doue, kalz dreist peb intent,
a ziwallo ho kalonou hag ho sperejou er Zalver Jezuz.



ALLELUIA! Spered Doue warnon: gantañ on kaset
da brezeg ar helou mad d'ar re baour. ALLELUIA !

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (3/10-18)

7. En amzer-se, e teue tud e-leiz da gaoud Yann Vadezour,
evid beza badezet gantañ,
10. hag e houlennent outañ : "Petra on-eus da ober ?"
11. Yann a responte dezo :
"An neb e-neus daou bez dillad, rei unan d'an hini a zo heb ket;
hag an neb e-neus bevañs, rei lod ive."
12. Dond a ree publikaned ive (paotred an truaou), evid beza badezet,
hag e lavarent dezañ : "Mestr, petra on-eus-ni da ober ?"
13. Hag e responte : "Na rit netra
en tu all d'ar péz a zo merket deoh."
14. Soudarded ive a houlenne outañ : "Ha ni, petra raim ?"
Eñ a lavare dezo : "Diwallit da wallgaz dén ebéd,
pe da ziskuill e-gaou, ha deoh da dremen gand ho pae."

15. O veza m'edo ar bobl war hed
 ha m'en em houlenne an oll outo o-unan
 daoust ha ne vefe ket Yann ar Mesiaz,
16. e lavare Yann d'an oll : "Me eo gand dour e vadezan ahanoh,
 med ema o tond an hini "zo kreñvoh egedon,
 ha n'on ket din da ziskoulma lèrenn e zandalennou :
 Eñ ho padezo er Spered Santel hag en tan.
17. En e zorn e vo ar bal-wenta
 evid nêtaad e leuriad-ed,
 ha dastum ar gwiniz en e hrignol ;
 ar pell, avad, a daolo da zevi en eun tan ha ne varv ket."
18. Gand kalz a zeurd kenteliou, ha re all c'hoaz,
 eh embanne ar helou mad d'ar bobl.

PEVARE SUL AN AZVENT



Lennadenn I a. - Doue a ro da houzoud, dre ar profed,
 e teuio ar Zalver er bêd e Betleem.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED MIKEAZ (5/1-4a)

1. Ha te, Betleem Efrata, kêrig dister e-touez mil kêr Bro-Juda,
 euz da greiz e lakin da zevel an dén a dle beza e penn Israel ;
 ar ouenn anezañ a zo euz a wechall, en amzeriou pella.
2. Rag-se e lezo Doue e bobl da veza er boan,
 beteg ma vo deuet, evid ar vaouez a dle kaoud eur mab,
 ar mare d'e lakaad er béd ;
 ha neuze e teuio en-dro ar rest euz e vreudeur daved bugale Israel.
3. Eñ a vo sonn en e zav, evid ober e labour a bastor ;
 gantañ e vo nerz an Aotrou, ha gloar uhel-meurbed e Zoue ;
 e dud dindannañ a vevo dienkrez,
 rag eñ a vo braz beteg pennou pella ar bed.
- 4a. Hag eñ e-unan a vo ar Peoh.



SALM 79 / 2ac & 3b, 15-16, 18-19

Diskan : On lakit adarre war-zao, Aotrou Doue,
 hag e vezim salvet.

- 2ac. Pastor pobl Israel, selaouit ; c'hwi, or pastor, diskouezit ho kloar ;
- 3b. dihunit nerz ho kalloud, ha deuit d'or zikour.
15. Doue, mestr ar béd, sellit euz lein an neñv,
 ha deuit da weled ar winienn-mañ, bet plantet gand ho torn ;
16. diwallit anezi, hag ar greskenn ho-peus dibabet diwarni.
18. Ra vo ho torn war an dén euz ho tibab
 war mab an dén kennerzet.
19. Biken mui ne dehim pell diouzoh : digasit buez ennom,
 ha ni 'vrudo hoh ano.

Eil Lennadenn. - Evid petra eo deuet Mab Doue er béd ?
Dreist peb tra, evid ober bolontez e Dad.

PENNAD EUZ AL LIZER D'AN HEBREED (10/5-10)

5. Va breudeur, en eur zond er béd, ar Zalver a lavar :
"N'eo ket fellet deoh kaoud na sakrifikis na prov,
med eur horv ho-peus stummet din.
6. Ar zakrifikisou peurlosket hag ar re evid ar pehed
n'int ket bet plijet deoh.
7. Neuze em-eus lavaret: Setu me o tond,
evel m'eo skrivet diwar va 'fenn e rolladenn al levr,
evid ober, va Doue, ho polontez."
8. Da genta e lavar ar Zalver :
"Sakrifikisou ha provou, re beurlosket ha re evid ar pehed,
euz ar seurd a ginniger hervez Lezenn Moizez,
n'eo ket fellet deoh kaoud, ha n'int ket plijet deoh."
9. Goudeze e lavar : "Setu me o tond evid ober ho polontez."
Terri a ra 'velse ar stad kenta, evid sevel an eil.
10. Diwar ar volontez-se a Zoue, ez om bet, ni, santelleet
dre ar brovadenn euz korv Jezuz Krist
grêt gantañ eur wech evid atao.



ALLELUIA! Ar Werhez a zougo, hag a hano eur mab,
hag a vo anvet Emmanuel, Doue-ganeom. - ALLELUIA!

AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (1/39-45)

- En amzer-se, war-lerh ar helou roet dezi gand an El,
39. Mari a zo eet en hent gand mall
warzu bro ar menezioù, d'eur gêr a Vro-Juda.
 40. Antreal a ra e ti Zakariaz, ha saludi Elizabed.
 41. Kerkent ha m'he-deus Elizabed klevet ar zalud gand Mari,
e-neus tridet ar hrouadur en he hreiz,
hag eo bet karget Elizabed euz ar Spered Santel.
 42. Savet he-deus he mouez, da lavared a-bouez penn :
"Benniget oh-c'hwi dreist an oll wragez,
ha benniget eo ar frouez euz ho korv !
 43. Hag a beleh e teu din kement-mañ :
mamm va Aotrou o tond beteg ennon ?
 44. Rag, kerkent ha m'eo deuet mouez ho salud beteg va diskouarn,
e-neus ar hrouadur tridet em hreiz gand al levenez.
 45. Evuruz an hini he-deus bet feiz
ha kredet e vo sevenet penn-da-benn
ar homzou bet lavaret dezi a-berz an Aotrou Doue."



SAKRAMANT AR BRIEDELEZ

II. EIL LODENN : lennadennou

I/ Evid an Abostol

1. Doue a grouas ar gwaz hag ar vaouez.

An den, gwaz ha maouez, a zo lakaet gand Doue e kreiz an oll grouadur-
ien. Bez 'ez eus anezañ kaerra tra krouet gand Doue, ar gaerra skeudenn
euz a Zoue. ~~Doue a zell ouz e labour~~ gand dudi. *ec e sell Doue ouz e labour.*

Pennad euz Lev'r Penn-Kenta ar Bed. (Gen. I/26-28, 31a)

Er penn-kenta e lavaras Doue:

26. Greom an den diwar or skeudenn ha da denna deom,
ra vo mestr war ~~ar~~ pesked ~~an~~ ar mor,
~~an~~ laboused ~~an~~ an neñv,
an anevaled doñv,
hag an oll loened gouez,
ha war gement a ya hag a zeu war an douar.

27. Doue a grouas an den diwar e skeudenn,
diwar e skeudenn e krouas anezañ,
e groui a reas gwaz ha maouez,

28. Doue o bennigas hag a lavaras dezo:
- Kreskit ha deuit da veza niveruz;
golei a reoh an douar
hag ober ho mestr warnañ.
Grit ho mestr war ~~ar~~ pesked ~~an~~ ar mor,
~~an~~ laboused ~~an~~ an douar
hag an oll anevaled a ya hag a zeu war an douar.

31a Doue a welas e oa mad kement e-noa greet;
ya, mad-kenañ e oa.

+++++

2. Doue a grouas ar vaouez

Daou dra a lavar deom amañ ar Skritur-Zakr: ar gwaz hag ar vaouez
o-deus ar memez orin; krouet int bet evid en em skoazella an eil egile;
greet int evid dord da veza daou en unan er garantez.

Pennad euz Lev'r Penn-Kenta ar Bed. (Gen 2/18-24-)

18. Goude beza greet an den kenta, an Aotrou Doue e-noa lavaret:
- N'eo ket mad e vefe an den e-unan;
mond a ran d'ober, evid e zikour, eun all heñvel outañ.

19. An Aotrou Doue e-noa stummet, diwar pri an douar,
oll loened ar mêziou hag oll laboused an neñv;

o digaset e-neus d'an den, da weled pe ano e rofe dezo,
evid ma vefe douget gand peb hini an ano roet dezañ gand an den.

20. An den, eta, e-neus roet anoicou d'an oll anevaled doñv,
~~da d'al~~ laboused ~~euz~~ an neñv ha ~~d'an~~ oll loened ~~euz~~ ar mêziou,
med n'e-neus kavet hini ebed par dezañ, evid e zikour.

21. Neuze an Aotrou Doue e-neus silet en den eur housk ~~poñner~~,
hag epad e gousk, e-neus lamet unan euz e gostennou,
ha klozet ar hig en-dro.

22. Ar gostenn kemeret gantañ diwar an den
e-neus an Aotrou Doue savet ganti eur vaouez,
ha digaset anezi d'an den.

23. Hag an den da lavared:
- Hoñman, er wech-man, a zo askorn euz va eskern,
ha kig euz va hig.
Anvet e vo maouez, pa 'z eo bet hoñman tennet euz ar gwaz.

24. Ablamour da-ze, ar gwaz a guitaio e dad ha e vamm,
hag en em stago ouz e wreg,
hag o-daou e vezint unan hebkén.

2bis. Beza en em gavet an eil gand egile
a zo eur hras gaer a-berz Doue.

Lennadenn euz Levr Penn-Kenta ar Bed. (Gen. 24/48-51, 58-67)

Abraham e-noa kaset e zervicher, ar hosa euz e zervicherien,
ha mercur e vadou, da glask eur pried da Izaag. Erruet e broñhini-
dig e vestr, e tigouezas gand Rebeka, e-tal ar feunteun, hag e lavaras
d'he breur Laban:

48. Deuet e oan da gerhod evid Izaag,
Rebeka, nizez va mestr.
An Aotrou e-neus va renet beteg da di dre an hent mad.
Stouet am-eus evid e azeuli,
ha benniget am-eus Doue, va Mestr.

49. Ha bremañ, ma plij ganech diskouez d'am mestr
karantez gwirion,
hen lavarit din didroïdell.
Mar dec nann, lavarit se din ivez,
hag e troin pe a-gleiz pe a-zehou.

50. Laban ha Betuel, tad Rebeka, a respontas:
- A-berz Doue e teu an dra-ze,
n'hellom lavared dit na mad na fall.

51. Setu amañ Rebeka dirazout:
kas anezi ganit ha ra zeuio da veza gwreg (pried) Izaag,
evel m'e-neus lavaret an Aotrou.

54. Antronoz e lavaras ar servicher da gerent Rebeka:

56. - N'am zaleit ket, va lezit da vond daved va mestr.

58. Gelver a rejont Rebeka ha lavared dezhi:

- Fa mond a rit gand an den-se?

Respont a reas:

- Ya, mond a rin.

59. Neuze e lezjont ^{o c'hoar} Rebeka, ~~o c'hoar~~ ^{he} hag e magêrêz,
da vond gand servijer Abraham hag e dud.
60. O bennoz a rojont da Rebeka, en eur lavared dezi:
- O, te, or ^{o c'hoar} ~~o c'hoar~~, ra zeui da veza mamm d'eur boblad diniver!
ha ra zeui da lignez da berhenna doriou hoh enebourien.
61. Kerkent e savas Rebeka hag he mitizien war ar hañvaled
hag ~~en heñchet~~ ^{mamm} da heul ar servicher.
Hemañ a gasas gantañ eta Rebeka hag a yeas an hent.
62. Izaag a oa d'an ampoent e chom en Negev.
63. Eet e oa er mêz diouz an abardaez,
pa welas, o sevel e zaoulagad, kañvaled oh erruoud.
64. Rebeka, o sevel he daoulagad, hi ivez, a welas Izaag;
diskenn a reas d'an traon diwar he hañval,
65. ha lavared d'ar servicher:
- Piou eo an den-se,
a zeu, war ar mêziou, en arbenn deom ?
Ar servicher a lavaras dezi:
- Va mestr eo !
Neuze e lakas he gouel hag e kuzas he bisaj. (dremm)
66. Ar servicher a gontas da Izaag kement e-noa greet.
Izaag a reas da Rebeka mond tre en e deltenn.
Dimezi a reas ganti, dond a reas da veza e wreg
hag e karas anezi.

3. Dimezi Tobiaz gand Sara

Er Skritur-Zakr, e welom eur paotr yaouank, Tobiaz, heñchet
a-berz gand an ^{Doue} ~~el~~ Rafael, pell diouz ~~an~~ ^{an} ti e-leh
ma kavo ar plah yaouank da blijoud dezañ. Evel-se ema Doue o ren
or buez.

Pennad euz Levr Tobiaz. (7/9c-10, 11c-17 hervez ar Vulgata)

En deiziou-ze,

9. Tobiaz, pa oe pedet gand Ragouel d'azeza ouz taol,
a lavaras dezañ:
10. - Ne zebrin ket amañ hirio, na ne evin,
ken n'ho-pe greet hervez va goulenn
ha prometet rei din ho merh Sara.
11. An tad a jom etre 'n daou heb ober respont ebed
da houlenn Tobiaz.
12. Neuze e lavaras dezañ an ^{el} ~~el~~ Rafaël:
- Rei a hellit ho merh da Tobiaz heb acn ebed,
den a zoujañs Doue eo;
dezañ eo e tle ho merh beza pried;
ablamour da-ze n'e-neus gellet den all ebed he haoud.
13. Ha Ragouel da lavared:

- Bremañ e welan mad eo bet selaouet gant Doue
ar pedennou a reen, an dour em daoulagad.
14. Kredi 'ran oh bet digaset ho-taou gantañ d'am haoud,
evid ma vo dimezet va merh gant eur gwaz euz he gouenn,
hervez lazenn Moïzez.
Ya, Tobiaz, bezit dineh bremañ;
he rei a ran deoh.
15. Dorn dehou e verh a gemer neuze hag a lak e dorn Tobiaz
en eur lavared;
- An Aotrou Doue, hini Abraham, Izaag ha Jacob,
ra vo ganeoh!
Bezit unanet gantañ er briedelez ha karget euz e vennoz. //
16. Kemer a ra peadra da skriva hag e ra ar paper-eured.
17. Goudeze ez eont ouz taol da zibri ar pred-eured,
en eur lavared bennoz da Zoue.

+++++

4. Pedenn an daou bried

Er Skritur-Zakr, e welom daou bried yaouank oh en em rei da bedi
asamblez da houlenn ma vo benniget o harantez gant Doue.

Pennad euz Levr Tobiaz. (8/5-10 hervez ar Vulgata)

Da noz o eured, e lavaras Tobiaz d'e wreg Sara:

5. - Ni 'zo lugale da dud santel
ha n'hallom ket beza priedjou e-giz ar bayaned,
ne anavezont ket Doue.
6. Sevel a reont eta o-daou hag en em rei da bedi
asamblez a-greiz kalon,
evid goulenn digand Doue o diwall dicuz an droug.
7. Tobiaz a lavare:
- Bezit benniget, Aotrou, Doue on Tadou,
bezit meulet gant an neñv hag an douar,
gant ar mor, ar marrennou, ar stêriou,
ha kement tra krouet a zo enno.
8. C'hwi ho-peus greet Adam, an den kenta, euz pri an douar,
hag ho-peus roet dezañ Eva d'e skoazella.
9. Ha bremañ, Aotrou Doue,
c'hwi'oar n'eo ket dre c'hoantegez,
e kemeran da bried ar plah-mañ euz pobl Israël,
med evid sevel eur famill ha kaoud lugale,
a vennigo hoh ano da viken.
10. Ha Sara da lavared d'he zro:
- En ho madelez, Aotrou, ho-pet truez ouzon!
Roit deom ar hras
da ren eur vuez eüruz asamblez beteg or hozni.

+++++

5. Ar garantez a zo kreñv evel ar maro.

Amañ e kavom kanenn ar garantez displeget gand bugale da Zoue.

Pennad euz Kanenn ar Hanennou. (Cant.2/8-10,14,16a,8/6-7a)

8. Setu va muia-karet o tond!
pignad a ra war ar menezioù,
larnad a-dreuz ar hrehennou.

Va muia-karet, setu en o tond!

9. Diredeg a ra evel eur gazeleenn,
evel menig eun heizez;
setu m'ema en tu all d'or moger,
selled a ra dre ar prenest,
spia a-dreuz ar glouedenn.

Setu en en tu all d'or moger,

10. Kerzet e-neus va muia-karet
ha lavaret din:
- Sao, va dousig koant, ha deus!

Va muia-karet, kerzet e-neus

14. Va zurzunellig, kluchet er garreg,
kuzet en tornaod (tevenn),
diskouez din da zremm,
ro din da gleved da vouez,
rag c'hweg eo da vouez
ha koant da zremm.

16. Va muia-karet a zo din
ha me a zo dezañ.

8/6 (lavaret e-neus din:)

- Ea vo garanet va ano en da galon,
ra vo merket war da vreh.
Rag kreñv eo ar garantez evel ar maro,
het distro eo ar youl evel an islong,
e flammou a zo flammou hag a zev,
bez 'ez eo eun tan-Doue.

7. Ar froudou n'int ket evit moug ar garantez
nag ar stêrioù braz evid he zamma.

+++++

6. Ar vaouez, sklerijenn an ti

Eun dra gaer a ro Doue d'ar gwaz, pa ro dezañ da bried eur vaouez
kaloneg ha modest en he doare.

Lennadenn euz Levr ar Furnez gand Ben-Sirah. (26/1-4,16-21 -hervez
ar Vulgata)

1. Eüruz ar pried e-neus eur wreg vad;
diou wech kaeroh e vo e vuez.
2. Ar wreg kaloneg a ra joa he gwaz;
an arusted a vo lod e-doug e vuez.
3. Eur wreg vad, setu eul lod a briz,
al lod a ro an Aotrou d'ar re o-deus doujañs evitañ.

4. Paour pe binvidig, laouen e vez o halon;
n'eus forz petra'zigouez, laouen e vez o dremm.
16. Gened ar wreg a ra levenez he gwaz
hag he gouziegez a zil yehed ha nerz ennañ.
17. Fur wreg hag a oar tevel a zo eun donezon a-berz Doue.
18. Ha n'eus netra par d'eur wreg savet mad.
19. Fur hras dreist peb-hini eo eur wreg modest.
20. Fun teñzor dreist priz an neb a oar delher warnañ.
21. An heol o sevel war menezioù an Aotrou;
evel-se sklerijenn he zi, gened eur wreg vad.

+++++++

7. Doue a ra eun emgleo nevez gand e bobl.

Emgleo a ra Doue gand an dud ablamour ma kar anezo.
Ar gwaz hag ar vaouez a zeu d'en em unani dirazañ a gemer perz
asamblez en emgleo-se. Hag al lezenn a laka Doue e goueled o
halon eo lezenn ar garantez a ya d'ahmad war gresk ha war
gaerraad.

Pennad euz Levri Jeremias ar Profed. (31/31-32a, 33-34a)

31. Komz an Aotrou Doue eo: Setu deizioù o tond
hag e rin eun emgleo nevez gand tiegez Israel ha gand familh Juda.
32. Ne denno ket d'an emgleo am-eus bet grêt gand o zadou,
en deiz n'am boa kroget en o dorn evid tenna anezo euz Bro-Ejipt.
33. En taol-mañ, setu peseurd emgleo a rin gand tiegez Israel,
komz an Aotrou Doue eo,
va lezenn a lakin en o hreiz hag e skrivin er o halonoù;
ne vo o Doue, hag int ~~da~~ va fobl.
34. N'e-devo ket ezomm kêñ d'en em gelenn kenetrezo,
en eur lavared an eil d'egile: deskit anaoud an Aotrou.
Fag peb-hini am anavez, euz an disterra beteg ar brasa.

+++++++

8. Piou a c'hellfe en distaga diouz karantez an Aotrou Frist ?

Puez an dud a feiz a zo diazezet war ar gredenn-mañ:
Doue a ro e zikour d'an dud e-neus karantez evito, en doare ma
vezint eüruz. N'hell netra o distaga diouz karantez an Aotrou
Frist. Ar garantez a zo evito lezenn o buez ha kredi a reont
e teu o harantez a dud d'o rên warzu ar garantez evid Doue.

Pennad euz Lizer Sant Paol d'ar Romaned. (8/31-35, 37-39)

- 31b. Va breudeur kêr, m'ema Doue ganeom, piou a vo a-eneb deom ?
32. N'e-neus ket damantet d'e Vab dezañ e-unan,

roet e-neus anezañ evidom oll:
penaoz, gand e Vab, ne rofe ket deom peb tra ?

33. Piou a zavo a-eneb an dud dibabet gand Doue,
pa 'z eo Doue an hini a laka dibeh ?
34. Piou a gondaono, pa 'z eo Jezuz Krist an hini 'zo marvet,
gwelloc'h c'hoaz, a zo savet da veo, a zo en tu deou da Zoue
hag a bed anezañ evidom ?
35. Piou a hello on distaga diouz karantez an Aotrou Krist !
ar waskerez, an anken, an heskinerez, an naon,
an dienez, ar riskl, ar hleze ?
37. Nann! e kement-se emm an treh ganeom,
dre zikour an hini e-neus or harer.
38. Ya, sur on a gement-se:
nag ar maro, nag ar vuez,
nag an êlez nag an oll gallouduziou kuzet,
nag an amzer vremañ nag an amzer da zond,
nag ar stered, nag an neñvol, nag an donderiou,
na netra krouet all ebed,
netra n'hello on distaga diouz karantez an Aotrou Doue,
a zo e Jezuz-Krist, on Aotrou.

+++++

9. Buez nevez ar gristenien

Sant Paol a béd stard ar gristenien d'en em ginnig da Zoue ha
da lezel karantez Doue da ren ha da zantellaad o buez. Gras Sa-
kramant ar Briedelez a zikouro ar priego da veza er stad vad
evid kement-se.

Lennadenn euz Lizer Sant Paol d'ar Romaned. (I2/I-2, 9-20)

- I. Va breudeur, ho pedi a ran stard, dre drugarez Doue,
d'en em ginnig, c'hwi hoh-unan
ha da ginnig ho puez,
en eur zakrifis santel, gouest da blijoud da Zoue.
Aze ema evidoh an deare gwella da adori Doue.
2. Na gemerit ket skouer diwar ar béd a vremañ;
med, grit deoh beza renevezet,
en eur rei eur stumm nevez d'ho spered,
evid gelloud anaoud petra eo bolontez Doue,
ar pezh a zo mad, ar pezh a blij dezañ,
ar pezh a zo peurvad.
9. Ra vo gwirion ho karantez,
tehit diouz an droug gand euz
hag en em stagit stard ouz ar mad.
10. Evel en em gar breudeur,
ho pet an eil ouz egile eur garantez tener,
peb-hini o lakaad ar re all uhelloc'h egetañ.

14. Roit ho pennoz d'ar re a wall-gas ahanoh,
roit ho pennoz ha n'eo ket ho malloz.
15. Bezit laouen gand ar re a zo laouen,
gouelit gand ar re a ouel.
16. Bezit troet kement-ha-kement an eil gand egile,
na vezit ket troet gand ~~al gander~~ *lerhajoù*,
med bezit douget d'ar pez a zo izel.
Arabad deoh lakad ho fiziañs,
en ho furnez hoh-unan.
17. Na rentit da zén droug evid droug .
Bazit aketuz ~~d'~~ ober ar mad dirag an oll dud.
18. Mar deo posubl ha kement ha m'ema en ho kalloud,
bevit e peoh gand an oll dud.

+++++

10. Templ ar Spered Santel eo ho korv.

Ne houlenñ ket ar feiz kristen kaoud dismegañs evid ar
horv; korv an dñn a zo d'an Aotrou Krist, a zeu d'e zante -
llaad hag a raio dezañ adsevel da veo. Mar on-devez resped
evid ar horv, joa ar gander or reno da joa an Aotrou
Krist.

Lennadenn euz Lizer Kenta Sant Paol da gristenien Korint.

(6/13b-15,17-20)

13. Va breudeur, ar horv a zo evid an Aotrou Jezuz
hag an Aotrou a zo evid ar horv.
14. Fa Doue, hag e-neus adsavet ar Hrist a varo da veo,
on adsavo, ni ivez, dre e halloud.
15. Ha ne ouzoh-hwi ket eo ho korvou izili an Aotrou Krist?
17. An neb a zeu d'en em unani gand an Aotrou
n'eo nemed eur spered hebken gantañ.
18. Tehit diouz an hudurnez.
An oll behejou a hell an dñn ober
a zo en diavêz euz e gorr,
med gand an hudurnez e peh a-eneb e gorr ~~en dñn~~ *en dñn*.
19. Ha ne ouzoh-hwi ket c'hoaz
eo ho Korv templ ar Spered Santel,
a zo ennoch hag ho-peus resevet digand Doue,
ha n'oh ket perhenn deoh hoh-unan ?
20. Kér kenañ oh bet prenet gand an Aotrou.
Rentit eta gloar da Zoue en ho korv!

+++++

II. Ar wir garantez

Ar pezh a ro priz d'eur vuez, n'eo ket ar pezh a vraz a heller ober, med ar garantez a ziskouezher berdez evid ar re a zo endro decr, eur garantez deuet digand Doue, skeudenn euz hini an Aotrou Krist. Klaskom kared gand ar garantez-se ha ne vo fin ebéd dezi.

Lennadenn euz Lizer Kenta Sant Paol da gristenien ker-Gorint. (I2/3I: I3/I-8a)

I2/3I. Va breudeur, e-touez donezonou Doue, c'hoantait kaoud ar re wella. Hag emañ c'hoaz o vond da ziskouez dech eun hent dispar dreist ar re all.

I3/I. Ha goude ma ^{ouezfen} komz yezou an dud, ha re an êlez zoken, ma n'am-eus ket ar garantez, n'on nered arer o seni pe simbalenn o tregerni.

2. Ha goude m'am-befe gras da brezeg, goude m'anavezfen oll visteriou Doue hag e ouiziegez penn-da-tenn, goude m'am-befe feiz euz ar starta, beteg diblas ar menezioù, ma n'am-eus ket a garantez, n'on netra.

3. Ha goude ma rofen va oll vadou en aluzenn, pe ma taolfen va horv en tan da zeñ, ma n'am-eus ket ar garantez, ne dalvez kement-se din da netra.

4. Ar garantez a oar gouzañv ha gortoz, troet eo da ober vad, ar garantez a zo heb avi, ar garantez n'en em veul ket, n'eo ket c'hwezet gand an orgouill;

5. ne ra ket troiou vil, ne glask ket he mad heh-unan, n'eo ket buan da daeri, ne zalh ket kont euz an droug,

6. ne gemer ket he flijadur, o weled ober gaou da zén, med joa he-deus gand ar wirionez;

7. pep tra a houzañv, peb tra a gred, peb tra a esper, peb tra a hortez.

8. Ar garantez morse n'eus dishar ebéd dezi.

+++++

I2. Mister ar briedelez.

Roet e-neus an Aotrou Krist deom da anaoud e garantez en eur zenti ouz e dad hag en eur gared ahanom "evel e gorv e-unan", beteg en em ginnig ha mervel evidom. Sant Paol a houlenn diganeom kared evel m'e-neus Jezuz karet ahanom.

Lennadenn euz Lizer Sant Paol da gristenien Efez. (5/2a, 2I-33)

- 2a. Va breudeur, lakit ar garantez en ho puez,
diwar skouer ar Krist:
ho karet e-neus hag en em roet e-unan evidoh.
21. Va breudeur, plegit an eil d'egile,
dre zoujañs evid an Aotrou Krist?
22. Ar gwragez d'o friejou, evel d'or Zalver;
23. rag, evid ar vaouez, ar gwaz a zo ar penn,
evel m'eo an Aotrou Krist ar penn evid an Iliz, e gorr,
en hag a zo ivez ar Zalver anezi.
24. Hogen, an Iliz a zuj d'an Aotrou Krist,
en heveleb doare, e tle ar gwragez suja d'o friejou e peb tra.
25. C'hwi, gwazed, karit ho kwragez,
evel m'e-neus an Aotrou Krist karet an Iliz:
en em roet e-neus eviti,
26. evid he santellaad en eur walhi anezi,
gand dour ar vadiziant hag ar Gorr a vuez.
27. Felloud a ree dezañ he lakad da bara dirazañ,
an Iliz-se kaer-meurbed,
na si, na rouvenn warni, na netra all evelse,
med santel ha divlam.
28. Setu aze penaoz e tle ar wazed kared o friejou,
evel ma karont o horv o-unan.
Kared ar pried a zo en em gared an-unan.
29. Biskoaz den ebed n'e-neus bet heug ouz e gorr e-unan;
er hontrol, e vaga a ra, ha kemer soursi anezañ,
ha setu perra 'ra an Aotrou Krist evid an Iliz,
30. o veza ma'z omizili euz e gorr.
31. Ablamour da ze, (a lavar ar Skritur)
e kuitaio ar gwaz e dad hag e vamm,
hag e stago ouz e wreg,
ha ne vezint o-daou nemed unan.
32. Braz eo ar Mister-se, hen lavared a ran o sonjal,
an Aotrou Krist hag an Iliz.
33. Evid ar pezh a zell ouzoh,
peb-hini a garo e wreg evel dañ e-unan
hag ar wreg he-do doujañs evid he gwaz.

+++++

I3. Deom-ni kared ha trugarekaad.

Sant Paol a houlenn diganeom lakaad karantez evid an nesa
en or buez, beza mad ha troet da bardoni. Gand an hent-se ivez,
e tle kerzed ar priejou kristen en o zi hag en o darempredou
gand an dud.

Lennadenn euz Lizer Sant Paol da gristenien Kolos.(3/I2-I7)

12. Va breudeur,pa'z oh tud dibabet gand Doue,
santelleet ha karet gantañ,
bezit leun a druez,a vadelez,a izelded,a zouster,a hasianted;
13. en em houzañvit ha pardonit en eil d'egile,
m'e-neus unan bem a; leh da glemm euz eun all;
evel m'e-neus an Aotrou pardonet deoh,grit kemend all.
14. Dreist peb tra,bezit leun euz ar garantez,
skoulm an oll vertuziou.
15. Peoh or Zalver da rân en ho kalonou,
ar pech m'oh bet galvet d'e gaoud o veza eur horv heñken,
ha diskouezit anaoudegez vad.
16. Komz Or Zalver ra jomo ennoh beo-buezeg;
e peb furnez,roit an eil d'egile kenteliou hag aliou;
gand salmou,~~h~~imou ha kantikou santel,
kanit a greiz kalon ho trugarez da Zoue.
17. Ha petra bennag a rit,dre gomz pe dre ober,grit peb tra,
en ano an Aotrou Jezuz,o trugarekaad drezañ Doue an Tad.

+++++

14. Beva er peoh hag en unvaniez en tiegez.

N'eo ket êz kared hervez lezenn Doue.

D'ar gwaz ha d'ar vaez en em zikour an eil egile,
evid ma vo santel o buez.

Lennadenn euz Lizer Kenta Sant Pêr. (3/I-9)

1. C'hwi,gwragez,bezit sentuz d'ho pried.
Evel-se,ma vez priejou ha na gredont ket ~~d~~ Komzou Doue,
e vezint gounezet,heb komzou,dre zoare beva o gwragez,
2. o weled an doare-se,glan ha leun a zoujañs.
3. Gwragez,n'eo ket en diavêz e tle beza ho kened:
bleo kinklet,bravigou-aour ha dillad kaer;
4. med en ho diabarz:
eun ene hag a jom atao dous hag habask:
setu aze ar pezh e-neus priz dirag Doue.
5. An dra-ze eo a ree gened ar merhed a-wechall:
o fiziañs a lakeent e Doue
ha doujuz e vezent d'o gwazed.
6. Evel-se e suje Kara da Abraham
hag e ree anezañ heb aotrou.
C'hwi a zo deuet da veza merhed dezañ.
Grit eta ar pezh a zo mad heb aon na strafuill.
7. Diouz ho tu,c'hwi,gwazed,
a ouezo intent,er vuez a renit asamblez,

eo ar merhed kizidikoh tud.
 Bezit doujañs evito,
 rag koulz ha c'hwi o-deus perz er hras a ro ar vuez.
 Evel-se ne zeuio netra d'hoh hegas¹ en ho pedennou.

8. Evid echui, ra vezo peoh etre an oll,
 douget d'en em zikour, d'en em gared an eil egile,
 gand douster ha lealded.

9. Na rentit ket droug evid droug,
 na droug-komz evid droug-komz;
 er kontrol, goulennit bennoz Doue war ar re all,
 peogwir ez oh galvet da reseo da herez bennoziou Doue.

+++++

15. "Karit dre oberou hag e gwirionez."

Peoh ar galon a gavim dirag Doue en eur gared da vad
 hag en eur zenti ouz gourhemennou Doue.

Lennadenn euz Lizer Kenta Sant Yann. (3/18-24)

18. Va bugale vian, karantez a dleom kaoud,
 n'eo ket dre gomz na diwar beg an teod,
 med dre ober hag e gwirionez.
19. Setu amañ penaoz e vezim sur da veza euz tu ar wirionez
 hag e lakim or houstiañs er pech dirag Doue:
20. ma tigouez e rafe or houstiañs rebechou deom,
 Doue a zo brasoh eged or houstiañs hag a anavez peb tra.
21. Va re muia-karet, ma n'he-deus or houstiañs netra da rebech deom,
 neuze ez om dienkreiz braz dirag Doue,
22. hag e resevom kement tra a hellom goulenn,
 22. ablamour ma virom e hourhemennou,
 ha ma reom ar pezh a blij dezañ.
23. Hemañ eo e hourhemenn: kaoud feiz e Jezuz Krist, e Vab,
 hag en em gared kenetreizom evel m'e-neus gourhemennet deom.
24. An neb a zalh da vired e hourhemennou a zo o chom e Doue
 ha Doue a zo o chom ennañ;
 ni a oar ema o chom ennom o veza m'e-neus roet deom ar Spered.

+++++

16. "Doue a zo Karantez."

Digard Doue e teu deom ar garantez. An neb a gar e gwirionez
 ne glask ket e vad e-unan, ne hortoz ket e teufe egile davetañ.
 Ober a ra evel Doue hag e-neus or haret da genta heb gouzoud e
 teufem d'e gared.

Lennadenn euz Lizer Kenta Sant Yann. (4/7-12)

7. Va re muia karet, en em garom an eil egile,
 pegwir eo ar garantez euz a Zoue,

ha kement hini e-neus karantez a zo ganet euz a Zoue
hag e-neus anaordegez a Zoue,

8. An neb n'e-neus ket karantez n'anavez ket Doue,
rag Doue a zo karantez.
9. Evelhenn eo deut karantez Doue da bara en on touez:
e Vab Unganet e-neus Doue kaset er bed, deom da gaoud buez drezañ.
10. Amañ eo ema ar garantez: n'eo ket ni on-eus karet Doue,
med en hini e-neus karet ahanom ha kaset e Vab,
da veza roet e sakrifis evid or pehejou.
- II. Va re muia karet, pegwir e-neus Doue karet ahanom kement,
ni a dle, diouz on tu, en em garoud an eil egile,
Doue a zo o chom ennom
hag ennom ema e garantez en he haer.

+++++

16 bis Gloar da Zoue ha meuleudi.

Euz ar garantez e-neus Doue evid an dud eo e tiver
ar garantez etre priedjou. Lavarom eta bennoz da Zoue
ha trugarez. Er pennad amañ warlerc'h, ar Hrist eo an Oan
hag an denelez e bried.

Lennadenn euz Levr an Diskuliadur. Apoc. 19/I-5-9a)

- I. Me Yann,
a glevas, en neñv, evel mouez kreñv
eur mor a dud o lavaroud: Alleluia!
D'an Oan ar zilvidigez, ar hloar, ar galloud.
5. Hag euz an tron, eur vouez ~~hag~~ a lavare:
- Kanit meuleudi d'on Doue,
c'hwi oll, e zervicherien hag ar re a zouj anezañ,
re vian ha re vraz.
6. Neuze e klevis evel mouez eur mor a dud,
evel mouez doureier braz,
hag evel mouez talmou kurun o strakal.
Lavared a ree: Alleluia!
Rag setu ma ren evel Roue, on Aotrou,
En an oll-halloudeg.
7. Bezom laouen ha tridom, rentom gloar dezañ,
rag setu deuet eured an Oan,
e bried he-deus en em fichet.
8. Roet eo bet dezi en em wiska gand dañvez lin fin,
glan ha skeduz;
al lin fin eo santelez ar zent.
9. Hag e lavaras din ar-êl:
- Skriv kement-mañ:
eüruz ar re a zo pedet
da goan-eured an Oan.

+++++

S A L M O U

SALM 32 (12 ha 18, 20, 21, 22)

Diskan : War an douar a-bez, Aotrou
en em astenn ho karantez.

12. Eüruz ar vro he-deus an Aotrou da Zoue
hag ar bobl dibabet gantañ da heritaj.
18. An Aotrou a bar e lagad war an den a zouj anezañ,
war an dud a esper en e vadelez.
20. Ema on ene leun a fiziañs en Aotrou:
or skoazell hag on divenn eo.
21. Ennañ e kav or halon al levenez;
en e ano santel on-eus fiziañs bepred.
22. Ra gouezo warnom ho kras, o Doue,
hervez ar fiziañs am-eus ennoh.

SALM 33 (2, 4, 5, 6, 7, 9)

Diskan : Tanvait ha gwelit
pegen mad eo Doue!

2. ~~Me-lavaro-bennoz~~ ^{Bennoz a lavaro} da Zoue e peb amzer,
e veuleudi berepd war va muzelloù.
4. Rentit gloar ganin d'an Aotrou Doue,
oll, a-unan, meulom e ano !
5. Pa zavan va rouez warzu Doue,
e vezan selaouet gantañ;
va dizamma 'ra euz peb enkrez.
6. Pa droer ar zelloù warzu ennañ,
e vezer er sklerijenn,
heb aon da ruzia gand ar vez.
7. Kriet e-neus ar paour a-greiz e drubuill.
Doue a glev hag hen dizamm euz e anken.
9. Grit eun tañva ha komprenit pegen mad eo an Aotrou Doue.
Eüruz an den a lak e fiziañs ennañ!

SALM 66 (2-3,4,5,7-8)

Diskan : Kemerit truez ouz ho pugale !
Roit ho pennoz deom, Aotrou Doue !

(ton: Eüruz an hini)

2. Plijet gand Doue skuill warnom e drugarez hag e vennoz,
plijet gantañ diskouez deom dremm laouen.
3. Evid ma vo anavezet dre an douar a-bez ho lezenn zantel
hag e-touez an oll boblou ho silvidigez.
4. D'ar boblou ho trugarekaad, Aotrou Doue,
d'an oll boblou lavared heoh trugarez.
5. Joa ha levenez d'an oll boblou:
rag c'hwi 'zo just o houarn an dud,
c'hwi 'zo reiz o ren ar boblou
hag ouz o heñcha war an douar-mañ.
7. Taolet e-neus an douar e frouez,
or benniget e-neus an Aotrou, on Doue.
8. Doue d'or benniga
ha da veza doujet dre an douar a-bez.

+++++

SALM 102 (1-2,8 ha 13,17-18a)

Diskan: Kanom bennoz da Zoue, va ene,
kanom bennoz da Zoue !

pe: ^{eo va Doue} Mad ha trugarezuz oh, va Doue !
^{eo} mad ha trugarezuz oh ! (ten: Kantikou N° 10)

1. Lavar bennoz da Zoue, va ene!
Kement a zo em hreiz, bennoz d'e Ano Santel !
2. Ya, va ene, lavar bennoz d'an Aotrou,
na zizonj morse e oll vadoberou !
8. Madelez ha trugarez eo an Aotrou Doue,
dib: ez da dêri ha madelezuz kenañ.
13. Evel m'e-neus eun tad kalon dener ouz e vab,
evel-se an Aotrou Doue evid an dud a zouj anezañ.
17. Med karantez Doue evid ar re o-deus doujañs evitañ
a zo anezi a viskoaz ha da viken.
18. Hag e justis evid bugale o bugale,
evid ar re a vir e emgleo.

+++++

SALM I27

(I-2,3,4-5)

Diskan :

Euruz an hini...
 pe: Kaer ha plijuz meurbed

1. Evuruz neb a vev e doujañs Doue,
 hag a heuill an heñchou merket gantañ.
2. Diwar labour da zaouarn az-po da zibri;
 evuruz e vi ha brao 'vo dit beva.
3. Da wreg,e diabarz da di,'zo par d'eur winienn,
 karget a frouez,
 da vugale en-dro d'an daol,par d'ar gwez-olivez yaouank.
4. Ya,evel-se e teu bennoz d'an den a zoujañs Doue.
5. Ra vi benniget gand an Aotrou,
 euz lein kêr Zion,bemdez 'hed da vuez.

+++++++

SALM I44

(8-9,10 ha 15,17-18)

Diskan:

Kanom bennoz da Zoue da viken!
 Kanom bennoz da Zoue !(ton:Kant.10)
 pe: Alleluia !

8. Leun a drugarez hag a vadelez eo an Aotrou Doue,
 pell a-barz taeri ha braz kenañ e vadelez.
9. Mad eo an Aotrou ouz an oll,
 ha trugarezuz ouz e oll grouadurien.
10. C'hwi 'vo meulet gand boh oll grouadurien,Aotrou Doue,
 hag ho tud fidel ho pennigo.
15. O daoulagad paret warnoh,an oll o-deus fiziañs,
 ha c'hwi 'ro dezo o bevañs d'ar mare.
17. Leun a justis eo an Aotrou e kement a ra,
 leun a vadelez en e oll oberou.
18. Dond a ra da gichen kement hini a bed anezañ,
 kement hini a bed anezañ a wir galon.

+++++++

++++++

SALM I48 (I-2,3-4,9-10,II-12,13)

Diskan: Meuleudi da viken
da Zoue,da Vestr ar bed ! (ton:Meulom oll...)

I. Meulit an Aotrou euz lein an neñvou,
meulit -hen,en uhelennou !

2. Meulit anezañ,c'hwi oll,e êlez,
meulit -hen,oll stered lugernuz!

3. Meulit anezañ,heol ha loar,
meulit-hen,oll stered lugernuz!

4. Meulit anezañ,neñvou an neñvou
ha c'hwi,douereier a-uz d'an oablou.

9. Menezioù,hag oll runioù,
gwez-frouez hag oll wez-sedrez!

10. Loened gouez hag oll loened doñv,
loened -stlej ha laboused-nij.

II. Rouaned an douar hag an oll boblou,
prinsed ha barnerien an douar !

12. Paotred yaouank ha merhed yaouank,
kozidi ha krennarded !

13. Ra veulint ano an Aotrou,
rag da uhel-veuli ema e ano,
dreist an neñv hag an douar,
ema meurded e Ano !

+++++

+++++

EVID AN AVIEL

17. Petra eo beza eüruz hervez an Aviel ?

O klask an eürusted ema ar re^azimez.
 An Aotrou Krist a embann lezenn an eürusted.
 Gand al lezenn-se, ez om galvet da zigas gwellaenn, heb ehan en or
 halon hag en or buez, evid beza heñveloh-heñvella ouz an Aotrou Krist.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze. (5/I-I2)

- I. En amzer-se, o weled pegement a dud a oa,
 Jezuz a zo pignet ouz tor ar menez;
 mond a ra d'azeza hag e ziskibien a dosta outañ.
2. Staga 'ra da gelemn anezo, o lavared kement-mañ:
3. " Eüruz ar re 'zo paour a galon,
 rag dezo eo rouantelez an neñvou.
4. Eüruz ar re 'zo leun a zouster,
 rag an douar prometet a hounezint.
5. Eüruz ar re o-deus da ouela, rag frealzet e vezint.
6. Eüruz ar re o-deus naon ha sehed euz servij Doue,
 rag o gwalh a vo roet dezo.
7. Eüruz ar re 'zo trugarezuz, rag d'o zro e kavint trugarez.
8. Eüruz ar re 'zo glan a galon, rag int a welo Doue.
9. Eüruz ar re a labour evid ar peoh,
 rag anvet e vint bugale da Zeue.
10. Eüruz ar re o-deus da houzañv ablamour da zervij Doue,
 rag dezo eo rouantelez an neñvou.
- II. Eüruz oh-c'hwi, pa daolo an dud dismegañs warnoh,
 pa raint brezel deoh, pa lavarint e-gaou a beb seurd droug eneb deoh,
 ablamour din-me: bezit laouen ha tridit gand ar joa,
 rag digoll kaer ho-peus da gaoud en neñvou.

+++++

I8. Holenn an douar ha sklerijenn ar bed.

En em gared an eil egile etre priedjou n'eo ket hebken klask beza euzuz an eil e-ser egile. Ar garantez bevet hervez lezenn an Aotrou Krist, a zo eur sklerijenn evid an tiegez hag evid ar bez, sklerijenn Doue e-unan.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze. (5/I3-I6)

Jezuz a lavaras d'e ziskibien:

- I3. - C'hwi a zo holenn an douar;
med, ma teu an hollen da goll e vlaz,
gand petra e vo roet dezañ e zaour ?
N'eo mad mui da netra,
nemed da veza taolet er mēz ha breset gand an treid.
- I4. C'hwi a zo sklerijenn ar bed;
eur gêr savet war lein eur menez n'hell ket beza kuzet.
- I5. Ne vez ket enaouet eur goulou,
evid hen lakaad dindan eur boezell.
Lakest e vez war eur hantolor hag esked neuze,
evid ma roio sklerijenn d'ar re oll a zo en ti.
- I6. Evel-se, ho sklerijenn a skedo dirag an dud,
hag e welint ar vad a rit;
ar re-mañ a rento gloar d'ho Tad a zo en Neñv.

+++++

I9. An ti savet war ar roh.

Ar re o-deus c'hoant sevel mad o ziegez, heb aon ebéd da gaoud
rag ar pezh a hell digouezoud, a dle rei dezañ an Aviel da ziazez
ha kerzed bennez war roudou an Aotrou Krist.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze. (7/21, 24-25)

21. Jezuz a lavaras d'e ziskibien:
- N'eo ket kerent hini a lavar: Aotrou! Aotrou!
a yelo e-harz Rouantelez an Neñvou;
med an hini a ra bolontez va Zad euz an Neñv.
24. Kement den a zelaou ar homzou a lavaran
hag a ra diouto en e vuez
a zo par d'eun den fur, savet ti gantañ war ar roh.
25. Kouezet eo ar glao, diruillet (eo) ar froudou,
dirollet (eo) an arzer war an ti-ze,
ha n'eo ket disahot;
rag diazezet eo war ar roh.

+++++

++++

20. Llamm ar briedelez n'hell ket beza torret.

Chom unanet evid atao, setu lezenn ar briedelez kristen. En Aviel e tigas Jezuz da zofij el lezenn-se. Med evid ar wech eo bet skrivet e kalonou ar re en em gar an eil egile.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze. (19/3-6)

3. Ar Farizianed a zeu da gacud Jezuz, evid klask e luzia, hag e lavaront dezañ:
- Daoust hag aotre e-neus ar gwaz da gas kuit e wreg evid abeg pe abeg ?
4. Jezuz a respont:
- "Ha n'ho-peus c'hwi ket lennet e-neus Doue krouet er penn-henta, ar gwaz hag ar vaouez ha lavaret dezo:
5. - Ablamour da gement-se, e kuitay ar gwaz e dad hag e varm, evid beza d'e wreg;
hag e teuint da veza, o-daou, eur horv hebken.
6. Evel-se ne 'z int mui daou, med eur horv hebken.
Arabad eo d'an den dispartia ar pezh a zo bet unanet gand Doue.

+++++

21. Gourhemenn braz ar garantez.

Kared e gwirionez a zo kared an nesa "eveldout-on-unan".
Jezuz a lavar eo ar gourhemenn-se ker braz hag an hini a lavar kared Doue.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze. (22/35-40-)

35. Unan euz an doktored war al lezenn a ra ar goulenn-mañ ouz Jezuz evid klask e luzia.
36. - Mestr, pehini eo ar brasa euz ar gourhemennou el Lezenn ?
37. Jezuz a respont:
- Kared a ri an Aotrou, da Zoue, ~~da~~ a greiz da galon, gand da oll ene ha da oll spered.
38. hennez eo ar brasa hag ar henta euz ar gourhemennou
39. hag an eil a zo par dezañ:
kared a ri da nesa eveldout da-unan.
40. D'an daou gourhemenn-se,
e teu kement a zo er skritur,
er Lezenn hag er brofeted.

+++++

+++++

22. Arabad eo d'an dñn dispartia ar pezh a zo bet unanet gand Doue.

Ar Hrouer a zo fellet gantañ e vefe unvaniez gwirion ha paduz etre ar priejou. Jezuz e-unan eo a lavar kement-se deom.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Mark. (IO/6-9)

Jezuz a lavaras d'e ziskibien:

6. - E penn kenta ar béd (pa grouas Doue an dñn),
e krouas anezañ gwaz ha maouez;
7. ha rag-se ar gwaz a guitaio e dad hag e vamm
hag a vezo d'e wreg,
8. ha ne vint o-daou nemed unan;
evel-se n'eus ket mui daou, med unan hebken.
9. Arabad d'an dñn eta, dispartia ar pezh e-neus Doue unanet.

+++++

23. Jezuz ha Mari da eured Kana.

Deuet e oa Jezuz da gêrig Kana da genver eun eured. Dond a ra war zikour an dud nevez, evid na vankfe netra d'o joa. Diskouez a ra evel-se e kemer perz e joa an dud.
Digas a ra ivez da zohj eo deuet war an douar d'en em unani gand natur mab-dñn, evid rei levenez dezañ. Ar re a zeu da eure^uji dirazañ a reseo o lod euz an donezon-se, kaerroh donezon eged gwe^ula gwin eur fest-eured.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann. (2/I-II)

1. En amzer-ze e oe greet eun eured e Kana Bro-Halilea,
ha mamm Jezuz a oa eno.
2. Pedet e oe bet Jezuz ive, hag e ziskibien gantañ.
3. Deuet ar gwin da vankoud, mamm Jezuz a lavaras dezañ:
- N'o-deus mui a win.
4. Jezuz a respontas dezi:
- Petra 'ra an dra-ze din ha deoh, maouez ?
N'eo ket deuet c'hoaz va eur.
5. E vamm, neuze, a lavar d'ar zervicherien:
- Grit kement tra a lavaro deoh!
6. Podou maen a oa eno, c'hweh anezo,
evid^d ar Yuzevien en em walhi hervez al lezenn,
hag e peb-hini ez ee daou pe dri vuzuliad. (wardro kant litrad)
7. Jezuz a lavaras dezo: " Lakit dour da garga ar podou!"
hag int d'o leunda 'rez ar bord.
8. Lavared a reas goudeze:
- Kemerit bremañ ha kasit da vestr ar pred!
Hag e kasjont dezañ.
9. Hemañ, p'e-neus tanveet an dour troet e gwin,
heb gouzoud a beleh e teue
- ar zervicherien o-doa tennet an dour a ouie 'vad! -
a halvas ar pried nevez d'e gavoud:

- IO - Laket e vez atao war an daol ar gwin mad-da genta,
ha pa vez torret d'an dud, an hini disterroh.
C'hwi, er hontrol, ho-peus miret ar gwin mad beteg bremañ.

- II. Setu burzud kenta Jezuz,
greet gantañ e Kana Bro-Halilea;
diskouezet e-neus e hloar,
hag e ziskibien o-deus bet feiz ennañ.

+++++

24. "Chomit em harantez."

Kared, hervez ma houlenn an Aotrou Krist, a zo rei ar vuez
evid ar re a garer. Gouzoud a ra ar Hrist petra eo kared:
roet e-neus e vuez evidom.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann. (I5/9-I6)

9. An dra-mañ c'hoaz a lavare Jezuz d'e ziskibien:
- Evel ma n'eus va Zad karet ahanon, me ivez am-eus ho karet.
Chomit em harantez.
- IO. Gand ma heuliot va gourhemennou, e chomit em harantez.
evel ma heulian-me gourhemennou va Zad hag e choman en e garantez.
- II. Kement-se am-eus lavaret deoh, evid ma vo va levezenn ennoh,
ha ma vo leun-barr ho levezenn.
- I2. Hemañ eo va gourhemenn din-me: en em garit an eil egile,
evel m'am-eus-me ho karet.
- I3. N'eus ket brasoh karantez eged rei ar vuez evid ar re a garer.
- I4. C'hwi 'zo va harantez ennoh,
ma rit ar pez a gourhemennan deoh.
- I5. N'eo ket an ano a zervijer a roan deoh hiviziken,
rag ar zervijer ne oar ket petra ra e vestr;
hemañ e roan deoh an ano a vignon,
rag kement am-eus klevet gand va Zad, am-eus roet deoh da anaoud.
- I6. N'eo ket c'hwi ho-peus choazet ahanon,
me eo am-eus ho choazet-c'hwi, ha roet karg deoh.
da vond euz va ferz ha da zougen frouez, frouez paduz.
Neuze, kement ho pezo goulennet digand va Zad em ano,
cñ hen roio deoh.

+++++

24 bis

"En em garit an eil egile, evel m'am-eus-me ho karet."

Kared e gwirionez a zo atao kemer perz e karantez an Aotrou Krist;
a zo beza kristen n'eo ket hebken dre zentidigez, evel servicherien,
med dre garantez, evel eur mignon.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann. (I5/I2-I6)

- Jezuz a lavare d'e ziskibien:
I2. - Hemañ eo va gourhemenn din-me: en em garit an eil egile,
evel m'am-eus-me ho karet.

- I3. N'eus ket brasoh karantez eged rei ar vuez evid ar re a garer.
- I4. ~~c'hwi~~ ^{Ema} zo va harantez ennoh,
ma rit ar pezh a hourhemennan deoh.
- I5. N'eo ket an ano a zervijer a roan deoh hiviziken,
rag ar zervijer ne oar ket petra ra e vestr;
bremañ e roan deoh an ano a vignon,
rag kement am-eus klevet gand va Zad am-eus roet deoh da anaoud.
- I6. N'eo ket c'hwi ho-peus choazet ahanon,
me eo am-eus ho choazet-c'hwi, ha roet karg deoh
da vond euz va ferz ha da zougen frouez, frouez paduz.
Neuze, kement ho-pezo goulennet digand va Zad em ano,
eñ hen roio deoh.

+++++

25. "Ma vint unan da vad."

An Aotrou Krist a bed e Dad evid e ziskibien, evid ma chomfent
unanet evel m'eo Doue unan. Prometi a ra dezo lakaad enno e garantez
dezañ e-unan.

Aviel Jezuz Krist hervez Sant Yann. (I7/20-26)

Araog kuitad ar bed-mañ, edo Jezuz o pedi e Dad evelhenn:

- 20 - Tad Santel, n'eo ket hebkén evid an diskibien a zo amañ emañ o pedi,
med ivez evid ar re o-devo feiz ennon diwar o lavar.
21. Grit ma vezint oll unan hebkén;
evel m'emañ-c'hwi, Tad, ennon-me, ha me ennoh,
grit dezo ivez beza unan hebkén ennon,
evid ma kredo ar bed ez eo ganeoh on bet kaset.
22. Ar hloar am-eus bet diganeoh am-eus roet dezo,
evid ma vint unan hebkén, evel ma 'z om-ni unan.
23. Me enno, ha c'hwi ennon, evid ma vint unan da vad,
ha ma ouezo ar bed ez eo ganeoh on bet kaset
hag ho-peus o haret evel m'ho-peus va haret-me.
24. Tad, ar re ho-peus roet din, a fell din e vefent ive ganin e-leh ma vezin,
dezo da weled va gloar, an hini am-eus bet diganeoh,
ablamour m'ho-peus va haret araog krouidigez ar bed.
25. Tad just, gwir eo n'e-neus ket ar bed anavezet ahanoh,
med me am-eus hoh anavezet,
hag ar re-mañ o-deus anavezet eo ganeoh on bet kaset.
26. Laket am-eus anezo da anaoud ervad hoh ano,
hag hen ober a rin c'hoaz,
evid ma vo enno ar garantez ho-peus evidon,
ha ma vezin enno, me ivez.

+++++